

(428, suite)

Chanson
An otron Goazalin.

Var ton :

Debonjour d'éc'h, va douciq coant,
Va c'harante, va muya c'hoant;
Dezir ameus ha bolonté
E rafemp hon daou amitié,
Gourout ha c'houi a ve contant :
Discleruyit pront ho santimant.

(429)

Otron, emei, va escuzet ;
M'o responts pa c'houloufet ;
Re huel eo ho galité
Da antrey er gomunoté.
C'houi zo dijentil a voad huel,
A verit caout eur demezel,
Ha me a zo eur bayzantéz.
N'ey don na nobl, na bourc'higez.

N'e get noblité a glazgan,
Nemet o c'arvet, mar gallan,
O cundui ey honestis,
Tremen an amzer ey devis,
Ha goude beza priejou,
Gant an amzer ni a verzo.

Otron, re a lexit bremañ :
N'ey d'on get capabl da vea,
Nac ho qerent, nac ho ligne
Na ve nicun contant ane
O pefe eur bayzantéz
Ne ve na nobl, na bourc'higez.

(430)

Na va c'herent, na va ligne

254

Ne zifero nicun anê ;
 Hac e vent-y oll drouc - contant,
 Me a rango cavet va c'hoant.
 N'eur gousquet hed eun noz n'o coste,
 Me o crayo nobl a galite .

Otrou, m'o ped d'am lezel bremañ,
 Poent bras eo d'emp dispartia,
 Ma zin d'ar gêr da vit va zud ;
 Aron bras ameus da gaout tabut.
 Eru ar poent da bepini
 En honestis en en renti .

Am eol zo huel, an de a zo scler,
 Ne get poent c'hoas monet d'ar gêr.
 Va douçiq coant, distroit ouzin,
 Eur veach c'hoas moc'h ambrassin.
 Entre va divrac'h evellen,
 Va douçiq coant en o carfen .

(431)

Hac e vec'h arze o touet din,
 Ne alfen bigen o credi,
 O pe carante evidon,
 Evel m'el lavarit, Otrou.
 Carante mal a zo fragil ;
 Otrou, c'houi voar hac en zo quir .

Va c'harante a zo certen,
 A zo evel eur souveren ;
 A zo evel eur romanis,
 Ne scuisfe james e yêonis.
 Ha pa ve sec'het ar grison,
 E fleuris bepret an deillon .

Otrou, m'o ped d'am lezel bremañ,
 Poent bras eo d'emp dispartia,
 Ma zin d'ar gêr da vit va zud,
 Aron bras ameus da gaout tabut.
 Eru ar poent da bepini
 En honestis en en renti .

(432)

Aza toi, va mestrez qer,
 Evitez a l'erit ez it d'ar qer;
 C'hoant am boa, qent an dispartu,
 E rojec'h euz assuranç benac din,
 Eur merv demeus ho carante,
 Erit soulaji va bue.

Me ne meus na nerz, na puissanç
 Dr rëy dëc'h enep assuranç
 Nemet demeus va fidelite,
 Me oc'h assur demeus a ze.
 Me gaeje, erit va goad naturel,
 Otrou, e vijec'h din qer fidel.

(433)

Distroit amân, va douziq coant,
 Ma roin dëc'h euz diamant,
 Eur voalen a bromission,
 Poc'h eus decevet va c'halon:
 Laqit-hi var ho torn deo:
 Goalen Doue d'or c'hunduo.

(Vol. II, p. 428-433)
 13 str. numérotées.